

21. Var an douar kanomp dezhi
Eur c'hantik leun a veuleudi.
E Collorec en he chapel,
Kanomp, kanomp, a vouez huel.
22. Deuit tadou, mammou kristen,
Var ho taoulin grit ho peden.
Diboan e veloc'h ho pugel
Eun deiz iac'h pesk en he gavel.
23. Nag eun dra bresk eo bugale !
Red eo varnho beillo noz de.
Mac'harit sur ho sicouro,
Da gass peb drouk divar ho zro.
24. Nag eun ene zo c'hoas breskoc'h !
An tenson ze fiziet ennoc'h.
Ama gant ar grassou skuillet
Ar iaouankiz a zo miret.
25. Deut eta gant devosion,
Deut da bedi a vir galon
Ar Zantéz 'zo dirag Doue
Ho tifennourez noz ha de.

Permis d'imprimer :

Quimper, le 3 Mars 1891.

EM. FLEITER,
V. g.

Kemper, impr. ann Eskobti.

8W2- 1-009



KANTIK
SANTEZ MAC'HARIT

E COLLOREC

— — — — —
Diskan.

O Mac'harit guerc'hez,
Guerc'hez ha merzerez,
Eus ho tron en Envou,
Grit d'hon bugaligou
Kreski var an douar
'Vit Doue hag he c'hloar !



1. Eus a eur voenn a baienet,
Er bed, Mac'harit zo ganet.
Mez abred eo bet he ene
Eus a voenn bugale Doue.
2. Var ar meziou e vez guele
Bleuniou alaouret, arc'hantet ;
Pa gouez, en anv, gliz an Envou,
E tivoanont a villierou.
3. Mac'harit en Ilis santel,
Zo divoanet guella bugel,
Da rei meuleudi d'an Dreidet
E renk glorius ar Guerc'hezet.
4. Var ar feiz kelennet dre guz,
Ra vezo meulet he vertuz !
Dirag he zud, dirag ar bed,
Er feiz e chomas start bepred.

5. En dro dezhi, paotrez vihan,
Ne vele nemet tud paian ;
Mez gant ar c'hoant da vont en Ee,
E c'halon ebken a domme.
6. Gant ar iaouankisou fall ar bed,
Morse ne reas darempred ;
Dious ar plijadur, an enor,
E kasse diouthi peb envor.
7. Evelse cuzet er prajou,
E chom freskoc'h ar bokedou ;
Plij a reont d'an daoulgad,
A bell e taolont ho c'houez vad.
8. D'an oll, ma plij bugale fur,
Satan n'ho c'har ket, a dra sur.
En dro d'ar bed e c'houez brezel
Da zivoenna an dud santel.
9. Fuloret tad Mac'haridik,
O velet he feiz birvidik,
Eb truez ous he vugel keaz,
Eus he di he zaolas er meaz.
10. Ah ! n'eus na ti na mamm na tad,
Var an douar eb distera mad,
Aounik bras rag ar pec'hejou,
E ped he zad zo en Envou.
11. En hann' Doue he magerez,
He lojas en he ziegez,
Hag d'ar plac'hik roas micher
Kass an denved d'ar prajeier.
12. N'oa ket doussoc'h mouez he denvet,
Ken koantik gant ho gloan guisket,
Eget he mouez, pa lavare
Eur beden devot da Zoue.

13. An Env ivez a zell outhi.
Da Vac'harit red eo .chench ti !
Ar Verc'hez, ar saent, an aelez,
Her galv da zont en ho zouez.
14. Ar saent, en ho c'hurunennou
No deus ket ar memez bleuniou,
O Merzerez, en hoc'h hini,
Ne vanko na roz na lili.
15. Prizoun, tan, kleze, dour-bero,
Evit hel lakaat d'ar maro,
Gant he bourrevien kounnaret,
Goassoc'h goassa zo pourchasset.
16. He barner a lavar : « Guerc'hez,
Sent ouzin ; ha te em falez
Reno par din var gant mevel.
— Nan! respount-hi, guelloc'h mervel » !
17. Satan dre spontailloù mezuz
A glask deceo pried Jezuz.
Ar Santez a ra sin ar groas ;
Ha treac'h dezhi ne vo biskoas.
18. Guelit skedussa sklerijen
O para tro var dro d'he fenn.
En he frizoun, saent hag aelez
A zalc'h dezhi koumpagnez.
19. O prezek d'an dud divadez
E tisplegas ar virionez.
An dud a gred, zo merzeriet
Hag he unan zo dibennet.
20. A denn-askel ar goulm euruz
A diz betek kaloun Jezuz.
He gloar, he vertuz, he genet,
Biken diganthi vo lamet.